

YF_0118_Melanie

C'hoant am-eus da ziskleriañ ur chanson a-nevez
Hag a zo bet komposet d'un den a galite

Ha d'un den a galite deus ar ganton Kallac
Hag a zo deuet da noter ba(rz) parrouz Mellioneg

Mond a ra da welet ur plac'h peta(g) Gwenndad Pelan
Med allaz, petra tal dan pa nei ne ket e c'hoant

An terruplañ plac'h yaouank ba(rz) kartier Sant Houarno
A zo ur verc'h da wirionez ha da paotr Keriou

Dre ur sulvez d'abardaez arruvas an den yaouank
Da gaouet an Thomas kozh abalamour d'e verc'h koant

"Bonjour deoc'h-c'hwi Thomas koz, bonsoir deoc'h a laran
Konjet ho merc'h Melanie diganeoc'h e c'houlennan

Thomas kozh en-eus respontet: "N'on ket facht gant se
Mard eo kontant Melanie, se vo gwelet goude

Bonsoir deoc'h Melanie vihan plac'hig joyus ha gae
Pa on deuet beteg ho ti an dervez a hirie

Me zo degaset amañ deus perzh an aotrou mat
'vit goulenn konsantamant gant ho mamm hag ho tad

'vid goulenn konsantamant gant ho mamm hag ho tad
Met diganeoc'h Melanie e c'houlennan da gentañ

Met diganeoc'h Melanie da gentañ e c'houlennan
Ha dre graz akordit din deus pezh a c'houlennan

Melanie he-deus respontet d'an den yaouank treitour
Me ne ran ket kalz a gas 'vit gweled ur gwenedour

Ur gwenedour n'eo ket mat 'met 'n press alc'hweet
Hag alc'hweio an teñzor vo ganin da viret

Pa viet kaset d'ar park da labour an douar
Ha neuze 'ta Melanie, c'hwi po keun ha glac'har

C'hwi po keun Melanie vihan bezañ ma refuset
Kar an aotrou deus Mellioneg (ne) deui ket ken d'ho kwelet

Distroit 'ta den yaouank ha deuit war ho kiz
Kar re interes ho-peus, n'on ket 'vit ho refus

An den yaouank a yeas d'ar ger e galon zo kontant
O tond d'annoñs he c'helou d'an den gentil yaouank

Pa oe erru war e giz e-barz ti an aotrou
"Peseurt mod emañ bet kont etrezoc'h c'hwi ho-taou